



Kantig evit gouel ar gwiniz-hada, hag an danvez bara-kan

LENTA LODENN :

1

O Jezuz, Salver mat,
Roit bennoz d'an had
A zeuy da veza goude-se
Bara d'hor c'horf ha d'hon ene.

DISKAN :

*Na dous e vo klevet
Hor gwiniz alqouret
O sourral pa vo deuet an hanv
Dindan eun ezenn flour ha*
[skanv.]

2

Darn eus hor greunigou
Daolimp en douaron
Evit diwan o deus ezomm
A c'hlaou, a c'hliz hag a heol
[tomm.]

3

Roit dezo Jezuz,
Glao, gliz hag heol founnus
Ma savint buhan d'ar vuhez
D'ober d'hor c'horf magadurez.

4

C'houi ren war ar bed-holl
Ne 'z ay netra da goll
Ma virit deomp hon drevajou
Dlouz amzer fall ha klenvejou.

5

Had, labour ha c'houezenn
Gant ho pennoz ouspenn
Hag e welimp hor parkeier
Deut glas gant an nevez amzer.

TON : *Aman pell diouz an-trouez.*

EIL LODENN :

1

N'eo ket d'e gorf hepken
Eo ret bara d'an den,
Dre m'ho peus savet, o Jezuz,
D'hon ene bara burzudus.

DISKAN :

*'Vit ober d'hor parrez
Bara sakr an aelez
Ni, ginnig deoc'h a galon vat
Bep a lodennig eus hon had.*

2

Grit ganto d'hon ene
Bara saourus an ne
Ni zeulo d'e zegemeret
Gant feiz ha karantez bepret.

3

O bara dudius !
Gant korf ha gwad Jezuz
Degemeret er sakramant
Hon ene 'chomo yac'h ha drant.

4

Aelez hag arc'haelez
Kanit ganeomp bemdez
Bennoz, mil bennoz d'eun Doue
A vag an dud korf ha ene.

A. CONQ.